

D'ANN

ITROUN CORGNE

O choum e Kastel Kerigonan, e Plounerin

E peb amzer kelen,
Awechou gourc'hemenn...

WAR DON : *Intanv al Lochen...*

Doue a zigas da beb bro
Eunn elik mad euz ar baradoz,
Hag ann holl a oar he hano
War ar menez hag enn traou ar roz;
Hen-nez eo El ar baourentez,
Hen-nez eo El ar mad-oberiou,
Hag evid ar binvidigez
E lavar rei eur plas enn Envou. (2 w.)

Eur galoun gant-han gounezet
War ann douar a ra burzudou :
Ann naoun, ar zec'hed zo torret,
Torred ar boan, stanked ann daelou;
Buez vad ha tiegez gren
D'an tad, d'ar vamm ha d'ar bugel,
Ha c'hoaz, e peb amzer kelen,
Ha d'ar gristenien eur skouer zantel. (2 w.)

Ann ti balan hag ann ti pri
A zo toet gand he ziouaskel,
Da vioc'h ar paour e ro peuri
Ha d'ann intanvez eur wir skoazel;
D'ar re goz arc'hand da c'hounit
E kerz ann hanv e kerz ar gouan,
Ha c'houi, beachour, mar deuit,
Digemer o pezo digant-han. (2 w.)

D'ar vugalez karantezuz
Dispign a ra evid ho skolia,
Hag e lavar evel Jezuz :
« Bugaligou, deuit holl ama. »
Anavezid ho tiwaller,
Anavezid El mad ho parrez,
Livirid d'ezhan eur *bater*
Da noz ha da veure gand evez. (2 w.)

Mar labour stard evid ann dud
Petra raio d'ann Aotrou Doue!!!...
Kanit, ma zeot, kasid he vrud
Dre ar bed holl hirio ha bemde;
Ha c'houi, ekleo, re dit brema
Dreisd ar moriou, ann enezennou,
Ha dazonid heb ehana
Er c'hoad ha war drez aour ann aochou (2 w.)

Eur c'halvar kaer e penn eur bez,
Kousked enn-han eur pried karet,
A ziwall anezhan bemdez
Beteg ann deiz ma vezimp barnet;
Enn he gichen zo eunn iliz,
Eunn iliz zavet gand hon Tadou,
Hanter-gouezed, allaz! iskiz,
Dindan beac'h pouner ar c'hantvejou. (2 w.)

E-touez al lann e Plounerin,
N'hallann pelloc'h tevel kement-ze,
Zo zaved eur Rozen lirzin
Skeduz da noz, skeduz da veure;
Ann Itroun Corgne ec'h eo hanvet
Ann El roet gand Doue d'hor bro;
Zant Nerin, gant-hi vo zavet
D'e-hoc'h eunn iliz nezez pa garo. (2 w.)

Euz hoc'h iliz stag he c'haloun,
E deuz eur c'hoant gwell vraz da welet,
Kent mond er gwele douar doun,
Ho tour hag hoc'h iliz asavet;
Hag evel ann dud-chentil goz,
Gand he fried ez ai eunn devez
Ebars enn iliz da repoz
Hag hec'h ene mad d'al levenez. (2 w.)

Ho tourn gan-e-hoc'h a zo zavet;
Zul gouel pemdez oc'h o vinniga,
Hogen d'ann deiz euruz meurbed
Ma viot gwelet gant kalz a joa,
Douget war eur c'hra vaz vruk roz
Da vond d'hoc'h iliz nevez doet,
C'houi a drido er baradoz
Hag hon Itroun a vo binniget. (2 w.)

Iec'hed, buez hir d'ar Rozen
A vev e Kastel Kerigonan!...
Dourn Doue a zo war he fenn
Hag eunn deiz da zont, pa lavarann,
E devezo eur gurunen
Kaeroc'h eged ann aour, ar perlez,
Gand he fried enn he c'hichen,
Kurunen skeduz ar zantelez! (2 w.)

Amen!!!

I.-M. AR IANN.

Gwengamp, Mae 1868.